

G U E R Z

*Var sujet un den Yaouanq a voa deut da
baea pevar scoet goude ma voe maro.*

SPERET-SANTEL, anflamit va speret,
Da gana ur c'hantic evit ar Vretonet,
Var sujet un exempl peini so êruet
Ebars e Breiz-Izel, e mis Du tremenet.

Crena ra va c'halon ive va oll memproù,
Va daoulagad ne feont nemet scuilla daelou,
O tont da gonsideri peguen trist eo ar matier :
Goulen a ran sicour eus ar Vere'hes santel.

Un den yaouanq, siouas, voa n'em abandonet,
Goude ma voa maro e dud gant ar c'hlenvet,
A voa n'em abandonet da bep sort tristidiguez,
Da bep sort tristidiguez, da bep sort paourentez.

Evel ma voa yaouanq, ne grede dasq netra :
Tud vad dre charite a gasse tamou dezà ;
Evel ma voa yaouanq e teujont d'er scandalat,
Pa ne gare sevel ha mont da labourat.

Soufr a ra mil injur gant guir baciantet,
O leuat e flanc er Vere'hes berniguet,
Dre m'en devoa he himach hac hini ar bassiguet.

Ha ma rê diraze bemde e orêson,

Un ozac'h eus ar c'hontre, un den eus ar c'harter
A deuas d'e velet, o clêvet, viser,
En eur lavarat dezàn : deus d'am zi da labourat,
Ar paour-qès a respontas : ne meus qet a zillad.

Gouzout o ràn certen labourat an douar.
Mes, alas ! eme ar paour, ne meus na pal na mar :
Pêvar scoet a vancqse dîñ evit en em eqipa,
Me a yêlo d'ho ty sur evit ho paea.

An ozac'h var ar guir a ro ar pêvar scoët,
O lavaret dezàn : va mignon, ne vancq qet,
En ur lavarat dezàn : deus d'am zi da labourat.
Pa po bet pal ha mar ha prenet da zillad.

Monet a ras d'e di, ma voc ur pennat mat;
Plijout a rê deze certen da labourat;
Un deiz dreist ar re all e voent meurbet estonet
O sonjal er paour-qès pelec'h e voa chomet.
Ma ejot da velet, ma voe cavet maro
Ebars en e gampric var un dornad colo.

Lienet voe e gorf vit beza entêret,
Ar brut a zavas prest, ma teuas tud d'e velet;
An den-mâ a deuas ive vel m'oa deus ar c'hanton,
A deuas d'e velet. O Doue pebes eston !

Pa sorti eus an ti d'an dud e lavare :
Orato birviquen e ene, ne antre
En barados Doue, qen en devo paet
Ar pezh a rôis dezàn neus qet pel pêvar scoët.

Dre ar c'homzou terrupl pere a brononças,
 N'oun penos an douar d'e longa na zigoras,
 Oc'h arrêti un ene a voa o vent d'ar joayou,
 A vije recevet gant Jesus en ênvour.

Ar Verc'hes gloriüs Vari, dre ma voa dei fidel,
 A accordas ur mennat evit e servicher;
 Ma, teuje var an douar un instant da labourat,
 Evit monet d'an ti da baea ar barbar.

Monet a zas d'e di ha ma voe recevet,
 Goulen a ra labour ma voe dezàn roet;
 Labourat a ra er parc qement hac an tri gñella,
 Ar pezh zo estonus, hep debri nac efa.

Pa zeu couls ar repas, caer vije er pedi
 Evit monet gante assambles da zébri,
 En em denne a goste, hac eno var e c'hinou
 En em string d'an douar evit souffr e beaniou.

Dont a ra'n usuiller, qemer a ra eston,
 Hac en monet ractal da laret d'ar Person
 En devoa ul labourer hac a rê qement ha tri;
 Ar pezh so estonus, ep eva na debri.

Ma, eme ar Person, continuït hepret,
 Brêmâ souden vatant me yêlo d'e velet.
 Pa êruas er parc, dre bermission Doue
 E haneveas pront penos voa un ene.

Me conjur, eme ar Person, lavar din, me a ped,
 Nê qet hario eiz de am boa da gorf entêret?

Petra a zefot dide, petra a glesques amâ?
 Petra a zefot did evit da zelvra?

Pêvar scoët am boa bet digant mestr an ti-mâ,
 On deut dre vouir voyen sur evit o faea :
 Oh! elec'h pêvar eiz certan a vezo roet,
 Ur veach, ene paour, qen a vi delivret.

Ne mêtus get ar pouar da antren er joayou,
 Nemet gant va El-mat e clêfen ar c'hélou :
 Pedit Doue evidon ma hia prest d'an évou ;
 Varc'hoas d'ar memes heur me rento ar c'hélou,

Dont 'a ra ar Person da zigas an arc'hant,
 Ma vije delivret a boan hac a dourmant.
 Me ' eme an enc, am boa int bet digantàn ;
 Po heus ar vadelez, me ho rento dezàn.

Pa astennas e zorn da guemer an arc'hant,
 E santas an ardeur, e boan hac e dourmant,
 E vrec'h deo betec e scoa en instant a voe dêved ;
 An arc'hant eus e zorn d'an donar so queet.
 Adieu, Otrou Person, me ya brêmâ d'ar joayou,
 Me bedo evidoc'h Jesus-Christ hon Otrou.

Pa dleo un den dec'h, pa yêl eus ar bed-mâ,
 Elec'h desirout droug pedit Doue gantâ :
 Pedomp bepret ha meulomp ma zefont da repos,
 Ha da veuli Doue en gloar ar barados.

FIN.

GUERZ AR GARNEL.

DEMP d'ar Garnel, Christenien, gûelomp ar religou
Eus hor breudeur, c'hoareset, hon tadou, hor mamou,
Demeus hon amezeyen, hor brassa mignonet,
Guelomp ar stad truezus e pini int rentez.

Guelet a reot anezo torret ha bruzunet,
Ha memes an darn-vuya a so en poultr rentet;
Ne veler mui o noblañ, o danvez o guenet,
Ar maro hac an douar o deus o distrujet.

Ar paour hac ar pinvidic, ar mestr hac ar snjet,
Oll e zint rentet henvel, oll int disevelebet;
Ne zeus mui nemet esqern, poultr ha breinadurez,
Dign eus a compassion hac eus a bep truez.

Hoguen er stat truezus e pehini int rentet,
E parlantont e langach mûd eloquant meurbet
Ous peh-unan ac'hanomp, mar qeromp profita
Qeñt ha ma plijo gant Doue hor lezel er bed-mâ.

Clêvit eta anezo, ha grit attantion,
E desir da brofita eus a greis ho calon:
Lavarat a rin deoc'h e zint het er bed-mâ,
Hac e varlet evelto pa, sonjot nebeuta.

Ni so bet var an douar o rën qercouls ha c'hui,
 O parlant hac o vale, o heva, o tibri,
 Ha cetu amâ bremâ er stat ina zomp rentet,
 Goude m'omp bet en donar o vezur ar prénved.

M'oa un den crén ha galant, ha me un dijenñ,
 Me voa un den pinvidic, ha me un den habil,
 Me meus collet va noblañ, ha me va 'oll danvez,
 Me va nerz ha va guenet, ha me va gouiziegez.

N'hon eus cavet er bed-mâ nemet hon œuvrou-mad
 Da bresanti d'or bärner, d'on Roue ha d'on Tad:
 Lët eta madou an douar, detestit ar viçou,
 Hac ornit mad oc'h ene a bep sort vertuziou.

Mar goulennit diganemp pelec'h êt hon enea
 Ni resposito : d'ar purgator, rac onnes eo hor bro :
 E maint en tân o têvi vit peur-bêa o dle
 Contractet var an douar da justic un Doue.

Eus a ouelet ar flammou ne cessont o crial,
 O o'houlén ho pedennou, ma ellint sortial
 Eus ar prisoniou teval e pere int tolet :
 Hastit, hastit d'ho zicour, ha ne zaleit qet.

Dêc'h-u en em adressomp, qerent ha mignonet,
 Da gaout memoa ac'hanomp pa zeot dre ar vëret,
 Livirit en ur dremen : Dote ra bardono
 D'an anaon er purgator, rac onnes ê hor bro.

Eun aluzen, eur beden grêt gant devotion,
 Eur yun pe un oferen, pe ur communion,

A ell calz hor soulagi, ha berrat hor poaniou,
Hac on tenna en un instant a ouelet ar flamou.

C'houi, Béleyen charitabl, en eus hor c'hunduet
En hent hor silvidiguez, pa edomp var ar bed,
Cuntunuit c'hoas un nebeut da gaout truez ouzomp,
Oc'h ober, dre drugarez, œuvrou mad evidomp.

Ispicial, o pedomp pa deuit da celebri
An oferen en His, clêvit neuze hor c'hri
Eus a ouelet ar flamou o c'houlèn digueneoc'h
Ma teuot d'ober gant Doue dre'r sacrific hor peoc'h.

Ha p'or bezo peur-baët az boan dleet d'hor pec'het,
Ni or bezo deoc'h neuze digant Doue reget.
Pedit, ni a rai ive; en em sicouromp oll,
Ennes vezo ar voyen ne dai den da goll.

Evel an dour o voug an tan-goal alumet,
An tan eus ar purgator a vez ive mouguet
Dre ar sacrific santel offret var an auter,
Da c'houlèn hon delivranç ous Doue hor Zalver.

Pa zorti an eol squeudus a zindan ar gouabren,
Ar bed-oll en un instant a receo sclêrijen :
Ni a zortio ive sclêr evel ar steret
Eus ar poaniou a souffromp dre'r sacrific offret.

Adieu, tadou ha mamou, breudeur ha c'hoareset,
Adieu, qerent, mignonet, adieu dêch, tud ar bed;
Ni a ra brema deoc'h hor c'himiad diveza;
Adieu deoc'h : qen a vezo e traonyen Josapha.

Roit ar repos eternal ! va Jesus, va Otrou,
 D'an oll cneou-decedet, pere so er flamou,
 Ebars en ho parados da veuli da james
 Assambles gant an oll Zent ha gant an oll Elez.

FIN.



E-Montroulez, eus a Imprimeri L. D. A. N.